

*Tud ar vro - Bro Leon*  
Roll kanaouennoù - Dañs a-benn

**Ar Jude**

Ar Jude 'zo ur vro vrav situet etre daou ganton  
En un tu emañ Sizun en tu all 'man Landivizio  
Situat ez eo ivez ya etre teir barrez  
Bourk Lambaol ha Lokmellar ivez an Dre-Nevez

Kalz broioù am eus treuzet dre m'am eus voyajet  
Diwar ribl an Télégraf, kaerañ bro 'm eus gwelet  
Ur chapel eus ar c'haerañ e Jude zo saved  
'N enor da Santez Anna, mamm gozh ar Vretoned

Ur richerig bihan tre a zo deuzh he zreuziñ  
Hag a gomañs er Brajenn er bod da echuiñ  
Un dudi eo er Jude labourat er parkeier  
Ma vez klevet de outi un nombr bras a gleier

Deuzh ar mintin pa savan 'klevan kloc'h bras Lambaol  
Kloc'hig bihan ar seurezed hag o tintal d'ar skol  
An angelus da grestreiz e kevan e Guimilio  
En Dre-Nevez, Lokmellar alies e Landivizio

Kle-evet a vez ivez Sant Tegoneg, Gwiglan  
Ha-a kloc'h e Kommanna en e barz e-unan  
Pa dostait an abardaez, echu son ar mouilc'hi  
Klevan sonerezh Sizun, Logi ha Plouziri

[ Ha kloc'h bras ]

Pa gomzin d'each deus ar c'haerañ sonerezh er vro-mañ  
Kloc'hig bihan Pen-ar-Gear hag hini Santez Anna.  
Kanaouennoù vez ivez dre partout er c'hontre  
O-o vond da nozvezhiañ, pe da leurioù nevez.

Ar c'horn-boud a vez klevet dre pevar c'horn ar vro  
O c'hervel da vont d'ar pred pe d'an ambrougdegou  
Ar bleuñv er bokedoù hag an delioù er gwez  
A kanaouenn ha dañs war al leurioù nevez

Pegen laouen eo da Zoue o gwelet e vugale  
O kanañ hag o tañsal er vro gaer a Jude  
'N om huanad diwezhañ 'c'houlennan c'hoaz gant Doue  
Kanañ c'hoazh ar son-mañ 'vit veuliñ va c'hontre

*Tad Augustine Bothorel, Locmélar.*